




KENVREURIEZ AR BREZONEG

h1

KATEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Taolenn an niverenn 41:

- 1) *Eur person da Fanch.*
- 2) *Pedennou-meur an Unvaniez* p.37
- 3) *Ar Groaz (Mab an Dig)* p.42
- 4) *Overennou evid ar Zent hag ar Zentezed.* P;53

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreuriez ar Brezoneg" (Koum. 25 lur), her goulenn digand an:

*Ao. Job SEITE, Skol an Aod, 29249 GUISSENY
CCP 1738-66 Rennes*

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

- 1°) "Levr-Overenn:

<i>gand eur golo ler drevezet</i>	<i>50 lur</i>
<i>" " " plastik</i>	<i>36 lur</i>
<i>" " " paper kalet</i>	<i>32 lur</i>

+ mizou kas
 - 2°) "Komz Doue en overenn" *Levr T* *30 lur*
 - 3°) "Komz Doue en Overenn" *Levr A, B, C pebhini* *20 lur*
 - 4°) "Ar Briedelez" *8 lur*
 - 5°) "An Nouenn" *8 lur*
 - 6°) "Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon" *35 lur*
 - 7°) "Kroaziou Keltieg" (*Bleun Brug*) *3 lur*
- + Mizou kas*

Troidigeziou aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an Ao. F. BARBU, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper,, d'an 19 a viz mae 1976

Visant FAVE, eskob skoazeller.

(N'eo ket echuet ganeom lizer Fañch d'e berson, an nemorant a zeuio...Med lizer on-eus bet ivez digand eur beleg hag e fell deom e embann dioustu.)

Da Fañch,

N'eo ket ho person a respont deoh hirio, med eur person all,unan euz personed an eskobti. Iakom an Aotrou:"Forz-piou."

Iennet am-eus al lizer ho peus kaset d'ho Person ha kalz plijadur e-neus greet din.

Me, gweled a rit, n'on ket evel ho person, a-du emañ gand ar brezoneg en ilizou; lavared a hellan deoh zoken ez eus ouspenn ugent vloaz ma labouran war an dachenn. Awechou e have din ez ee an traou war a-raog, awechou all e welen mad e chome atao an traou en o hoch koz.

Ya, brezoneg eta evid an ofisou en ilizou...

Ha koulskoude, va lezit din lavared deoh n'emañ ket atao a-du gand ar pezh a skrivit.

"Ober implij, a lavarit, euz ar yez a gomz bemdeiz an dud etrezo a vefe folkloraj?" Me a zo person war ar miz ha kredit ahanon, amañ ne vez nemed galleg e kalz tiegeziou.

Kavoud a ra deoh, ouspenn, ez euz eet re hir, ez eus bet roet re ha re vuan plas d'ar galleg en ilizou. Ya, me a gav din ivez. Med dond war a-dreñv? Nann! Kement-se n'eo ket posubl. An traou, d'an soñj, a zo da gemered bremañ evel m'emañ: en oll ilizou koulz lavared ne vez tamm brezoneg ebet ken, eur hantig bennag awechou, e lod anezou. Petra da ober? Aze emañ an dalh!

Kendalhom gand ar pezh a skrivit.

Ar galleg, d'an soñj, e-neus bet an treh war ar brezoneg bremañ ez-eus eun tregont vloaz bennag; med an treh-se n'eo ket deuet en eun taol. Bremañ ez-eus tregont vloaz edon kure en eur barrez vraz war ar miz. D'ar mare-se e veze brezoneg e peb tiegez koulz lavared ha koulskoude deg vloaz araog dija e veze er barrez-se eun overenn e galleg penn da benn ha diou e brezoneg. Bremañ n'eus ano ebet ken euz overenn e brezoneg. N'eo ket eur person o tond eo a ziskar en eun taol ar brezoneg en eur barrez. P'eo deuet ho person en ho parrez, bezit soñj, me a zo sur e va greet an droug pell a oa: eun tamm galleg hirio, war zigarez pe zigarez, eun tammig muioc'h goude-se hag ar brezoneg o kila.

Plijoud a ra din, evel d'ho person, mond da ober eur varvailladenn goude an overenn gand va farrezioniz; brezoneg a vez ganeom aliez awalh, med aliesoh ez-eom e galleg. Ar brezoneg koulskoude a blij deom med atao e vez hiniennou ha n'ouzont ket ar brezoneg pe o deus poan euz hen distripa, ha setu ez aer e galleg kazimant beb tro. Gweled a ran ez a war rouesaad endro din an dud koz barrekoh war ar brezoneg eged war ar galleg. A-benn deg vloaz amañ ne jomo mui nemeur anezou!

Bremañ, kredit ahanon ivez: kalz eo diesoh d'ar beleg prezeg e brezoneg eged e galleg. Pa'za ar beleg e galleg, emezoh, e teu alies gantañ galleg re uhel ha gwir eo. Diez eo displega, e galleg izel awalh, ar pezh a vez da lavared en on amzer ha diesoh c'hoaz e brezoneg. Ne gav ket din, -marteze e fazian-, e ve mad deom prezeg hirio evel ma veze prezeget tregont vloaz'zo. Bez'ez eus, evelse, e penn an dud en oad, riboulou brao war bouez-traon, êz da heulia, med taolom evez! An dud a zo hirio e penn an tiegeziou, tud tregont ha daou-ugent vloaz, a zo kalz barrekoh war o labour eged o zud, deskadurez o-deus war beb tachenn; red eo e vefe or prezegennou gouest hirio d'o zikour en o buez a gristen.

Tro e-neus ar beleg d'henn ober e galleg ma poan da studia, hag e brezoneg zoken, med neuze e vo red dezañ gouzout mad ar brezoneg evid komz euz mennoziou nevez ha trei diwar ar riboulou koz.

(Embannet evel m'eo bet skrivet war goulenn an oberour.) K.ar Brezoneg)

-I-

An Aotrou DOUE ganeoh
-Ha gand ho spered

Or halon d'an uhel
-Savet eo war-zu ennoh.

Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou,
-Just ha santel eo.

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad,
c'hwi, Aotrou Doue, Tad Santel meurbed;

heb ehan e klaskit lakaad ar vuhez
da vond atao war gresk ennom.

Dre ma'z oh eun Doue a garantez hag a druez
e talhit da ginnig dalhmad ho pardon
ha da helver ar beherien da gonta netra nemed war ho trugarez.

N'ho-peus ket gwechall on dilezet,
goude deom beza nahet aliez an emgleo ganeoh.

Digaset ho-peus famill vraz an dud, dre ho Mab Jezuz Krist,
da veza unanet ganeoh dre eul liamm ken kreñv
ma ne hallow e neb doare beza torret.

Er mare-mañ, mare a hras hag a unvaniez evid ho pobl,
C'hwi a-ra dezi, en Aotrou Krist,
trei a galon war-zu ennoh
ha beza e servij an oll dud.
O lezel ar Spered Santel d'he rén muioc'h-mui.

Rag-se, o soñjal en hoh oberou burzuduz,
e kanom deoh meuleudi:

A-unan gand an Elez, ni a fell deom meuli ho karantez hag ho kalloud,
hag embann ivez pegen laouen om-ni
da veza salvet gand Jezuz.

SANTEL, SANTEL, SANTEL AN AOTROU DOUE, MESTR AR BED
LEUN EO GAND HO KLOAR AN NENV HAG AN DOUAR.

HOZANNA E BARR AN NENVOU.

BENNIGET AN HINI A ZEU EN ANO DOUE.

HOZANNA E BARR AN NENVOU.

Aotrou Doue, abaoe penn-kenta ar-béd,
e rit d'an den ar pez 'zo mad
evid ma teuio da veza santel evel ma'z oh-hwi santel.

Taolit eur zell war ho pobl santel bodet aman,
ha grit, dre nerz ar Spered Santel, ma teuy ar provou-man
da veza korv ha gwad Jezuz Krist,
ho Mab muia-karet
a ro deom-ni ivez beza mab deoh.

Aet e oam da goll, ha n'hellem ket, drezom on-unan,
distrei davedoh.

Neuze avad ho-peus bet evidom ar vrasa karantez.

Ho Mab-En just hag En hebken-en em lakaas etre on daouarn
hag a oe staget war ar groaz.

Med, araog astenn e zivreh etre an neñv hag an douar,
evid beza sin peurbadel an Emgleo savet ganeoh

En a fellas dezañ lida ar Pask gand e ziskibien.

O preja ganto, e kemeras bara, e rentas deoh bennoz ha trugarez
e torras ar bara hag hen roas dezo en eur lavared:

"Kemerit oll ha debrit euz hemañ,
Va horv eo roet evidoh."

Evel-se c'hoaz, goude koan,
o houzoud mad ez ae da adunvani ar bed a-bez ennañ e-unan
dre e wad skuillet prest goude war ar groaz,
e kemeras ar halir leun a win,
e rentas deoh adarre bennoz ha trugatez,
hag hen roas d'e vignoned en eur lavared:

"Kemerit oll hag evit euz ar halirad-man,
rag va gwad eo,
gwad an emgleo nevez ha peurbaduz
a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud
da bardoni ar pehejou."

Lavared a reas dezo ivez:

"C'hwi 'raio kement-man
gand ar zoñj ahanon."

Setu perag, gand ar zoñj euz Jezuz Krist,
En or Pask hag or peoh asur,
o lida e varo hag e adsao da veo,
hag o hortoz an deiz kaer ma teuy endro,
e kinnigom deoh, Aotrou Doue, feal ha leal
ar zakrifiz a ra d'an dud beva en ho kras.

Tad trugarezuz meurbed,
taolit eur zell a garantez war ar re oll a unanit ganeoh,
o rei dezo perz e sakrifiz or Zalver,
ma teuio nerz ar Spered Santel d'ober anezo oll asamblez
korv ho Mab adsavet da veo,
ma vo pelleet peb dizunvaniez.

Dalhit ahanom unanet kenetrezom a galon hag a spered
unanet ivez gand on Tad Santel ar Pab, gand on Aotrou 'n Eskob.

Roit deom ho sikour,
ma labourim oll asamblez da skigna ho Rouantelez,
beteg ma tigouezo evidom an eur da veza ganeoh
Sent e-touez ar zent, gand ar Werhez Vari hag an Ebestel,
hag ivez gand or breudeur eet da anaon,
a fiziom en ho trugarez.

Neuze avad, lakeet en eur bed nevez,
eur bed lamet diwarnañ peb breinadurez,
e hellim kana deoh bennoz ha trugarez,
a-unan gand or Zalver Jezuz, beo da virviken.

Drezañ, hag ennañ, ha gantañ,
Deoh-hwi, Doue an Tad oll-halloudeg
a-unan gand ar Spered Glan
Peb gloar ha peb enor
A-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

-2-

An Aotrou Doue ganeoh.
-Ha gand ho spered.
Or halon d'an uhel.
-Savet eo war-zu ennoh.
Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou,
-Just ha santel eo.

Aotrou Doue, Tad oll-halloudeg,
deoh-hwi e fell deom kana bennoz ha meuleudi,
dre or Zalver Jezuz Krist,
evid hoh oberou burzuduz dre ar bed.

E-kreiz an dizunvaniez a zo er bed,
etre ar sperejou hag ar halonou,
e teuit da boulza an dud da ober ar peoh etrezo.

Ya, ho spered Santel a labour e kalon an dud,
da lakaad an enebourien d'en em glevet etrezo
da vond adarre dorn-ha-dorn
da lakaad ar poblou da ober ar peoh.

C'hwi eo a ra da youl ar peoh lakaad fin d'ar brezelioù
ha lakaad ar pardon da zond a-benn euz ar gasoni
hag an droulañs da gila dirag an drugarez.

Rag-se e tleom heb ehan ho trugarekaad hag ho meuli
a-unan gand an êlez, aketuz atao da gana deoh:

SANTEL, SANTEL, SANTEL AN AOTROU DOUE, MESTR AR BED.
LEUN EO GAND HO KLOAR AN NENV HAG AN DOUAR.
HOZANNA E BARR AN NENVOU.
BENNIGET AN HINI A ZEU EN ANO DOUE.
HOZANNA E BARR AN NENVOU.

Aotrou Doue, Mestr oll-halloudeg ar bed,
Bennoz a rentom deoh dre ho Mab Jezuz,
deuet davedom en hoh ano.

Eñ eo ar Gomz a ro deom ar zilvidigez,
Eñ eo an dorn a astennit d'ar beherien,
Eñ eo an Hent, a zeu deom ar peoh drezañ.

Aotrou Doue, Tad deom oll, ni hag a oa eet pell diouzoh,
c'hwi ho-peus digaset ahanom endro,
dre ho Mab roet gaheoh d'ar maro,
evid ober deom distrei war-zu ennoh
hag en em gared an eil egile;

Setu perag, en eur gana deoh meuleudi
evid an unvaniez sevenet gand or Zalver,
ni ho ped da zantellaad ar provou-mañ dre nerz ar Spered Santel;
p'emaom oh ober ar pezh e-neus ho Mab gourhemennet deom.

Rag, war ar poent da rei e vuez, evid on dasprena,
Jezuz, epad ar goan ziweza, a gemeras bara etre e zaouarn,
a rentas deoh bennoz ha trugarez,
hen torras hag hen roas d'e ziskibien en eur lavared:

"Kemerit oll ha debrît euz hemañ
Va horv eo roet evidoh."

Evelse c'hoaz, goude koan,
o houzoud mad ez ae da adunvani ar bed a-bez ennañ a-unan,
dre e wad skuillet prest goude war ar groaz,
e kemas ar halir leun a win,
e rentas deoh adarre bennoz ha trugarez
hag hen roas d'e vignoned en eur lavared:

"Kemerit oll hag evit euz ar halirad-mañ
rag va gwad eo,
gwad an emgleo nevez ha peurbaduz
a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud,
da bardoni ar pehejou."

Lavared a reas dezo ivez:

"C'hwi 'raio kement-mañ,
gand ar zoñj ahanon."

Aotrou Doue, ho Mab e-neus lezet gand hoh Iliz ar zakrifis-mañ
evid deski deom bepred e garantez.
Gand ar zoñj eta euz e varo hag euz e adao da veo,
e kinnigom deoh, diouz on tu, ar pezh ho-peus fiziet ennom:
sakrifis an unvaniez gwirion.

Ni ho ped, Tad Santel, d'on digemer a-unan gand ho Mab.

Dre ar pred-mañ, skuillit ennom ar Spered Santel
evid terri peb dizunvaniez hag ober deom en em gared etrezom,
gand an Tad Santel ar Pab, an Aotrou 'n Eskob,
an oll eskibien hag ho pobl santel a-bez.

Grit ma vo sin euz an unvaniez ha servicher ar peoh.

Bodet ho-peus ahanom amañ, ouz taol ho Mab,
unanet gand ar Werhez Vari hag an oll zent;
Grit ivez ma vo an dud oll, a beb stad hag a beb pobl,
a beb ouenn hag a beb yez,
bodet evid Pred burzuduz an unvaniez gwirion,
er bed nevez, beuzet er peoh, dre Jezuz Krist, on Aotrou.

Dre Jezuz Krist hag ennañ, ha gantañ,
Deoh-hwi, Doue an Tad oll-halloudeg,
A-unan gand ar Spered Glan,
peb gloar ha peb enor
A-oll viskoaz da virviken. AMEN.

AR GROAZ.

(Mab an Dig)

-Kentskrid-

Da beleh e kerzîm gant al lidou nevez ?

Gwelet a reom e ofisou renet gant beleien speredeg, gant ar veneh-se, o deus bet atao brud da veza tud fur ha santel, lenn skridoù ha n'int bet morse er skritur-santel. Ar re o deus o zavet o doa eur relijion disheñvel-krenn diouz on hini. Koulskoude o menozioù a hell ober vad deom. Setu ali ar veneh ha gizioù ar veneh atao a gemer !

-N'emaoun ket a eneb...o nann ! tamm ebed !

N'eo ket red deom maga on ene hebken gant skridoù Bro ar Jude-Skriva-nerien all o deus savet hag embannet traou santel, dudiuz kenañ !

Arabad deom, a gav din, kaoud aon, ni Bretoned, da heñvel hent ar veneh ! Nag a draoù a dalvoudegezh uhel ha santel e skridoù koz or bro... Ni on eus bet kement a varzed !

Pedennou kalloù a rafe deom, war va meno, muioù a vad en overenn eged lod euz lennadennou euz an Testamant koz diêz da gompren en amzer ma vevom.

Kerzom war an araog ni ive, warhoaz e vo re ziwezad !

Eun dra c'hoaz....Ni on eus eur brezoneg iliz...eur brezoneg dour benniget, eur brezoneg aliez pell diouz ar vuhez pemdezieg !

Tud yaouank on amzer, re all kosohig, a houlenn taolennou gwirion, goude ha ma ve križ kenan o liou.

Gwechall, o tisplega taolennou, or prezegerien a oa drusoh, kalz sañuroh o zoubenn.

Hirio dour dilav !

Renevezi a zo rei saour....ha liou.

Dirag ar mor, uhel war eur garreg
ar groaz!

Abaoue m'eo bet staget outi or Zalver...
uhel a-uz d'ar bed oll e par skeduz
ar groaz!

Hi hebken eo louzou meur ar bed !
e sklerijenn ,
stouom dirazi,
Kerzom daveti!

LIZER PLIN.

-Nag a istrimanchou o deus klasket, a glask kuzad ar Groaz...
sevel en he leh bannielou an ourgwili, ar sklavaj !

An emgann a zirollas...an emgann a gendalh !
Ouz ar groaz
en noaz
Doue !

Ablamour m'or har evel e vugale:
ar bannielou oll or galv d'an emgann!
Ar groaz hebken d'ar garantez!
Karantez Doue biken ne varvo!
an treh ne hell beza nemed d'ar Groaz !

°
° °

Amañ, Impalaer, e kaver muioh mui
a dud foll hag a gred en eun den 'zo maro.
E ano zo Jezuz, mab Jozef ha Mari.
Doude poaniou garo,
staget ouz eur groaz
en noaz.

Evel ar sklavourien e varvas e Jude,
oh embann edo Doue!
Ha diouz ma leveront eo savet euz ar bez.
An nor 'zo bet torret, emezo, gand êlez,
Ha bremañ e teu en dro,
war o meno,
bemdez d'ar pardaez, epad o fedennou,
hag e teuont, a vandennou,
da zebri, emezo, korv o Doue
diskennet euz an neñv
en eur hoz tamm bara !

Euz or hreansou-ni, ne gredont mui netra.
Falz Doueou, emezo! n'eus nemed on Doue,
an hini bet staget ouz kroaz ar Jude,
an hini ouz ar groaz
en noaz !

A-hendall, an dud-se a zent ouz ol lezenn.
Amañ ez-int anvet gand an dud kristenien.
Ar pezh souezusa, o harantez dispar,
paour ha pinvidig etrezo en em gar.
Donjer ebed ouz ar sklavour!
Ni a zebr, emezo, an hevelebar,
korv on Doue,
a deu da gompesa,
peb kemma, peb kasoni. On Doue 'zo maro
'vid e oll vugale.
liammet en e wad, ni oll en em garo.
Petra, Impalaer, ober en o henver ?

Petra roet e kenver ar re ne zont ket
d'on doueou benniget ?
O laza, Plin. Klevoud a rit! o laza,
beteg an diweza.

Ganto eorjellet
or galloud, nerz or bro.
D'ar maro!
Ar bobl a renk senti,
ar bobl a renk kredi,
eo ni, an Impalaerien,
e zoueou! ni hebken !

Eag an neb ne zent ket, hennez a renk mervel
d'ober aon d'ar re all !
An dud-ze 'zo tud fall.
Labourad a reont a eneb al lezenn.
Skurjezit da genta. Pa bins ar vialenn
ar spered a zigor.
Ha ma ne zigor ket...lopit ta gand imor
beteg ma vint tohor.
Ha peogwir e kredont en eun den en noaz,
staget ouz ar groaz,
embannit dezo-ta e varvint ive,
evel o Doue,
euz ar groaz
en noaz !

Me ho peuzo, kristenien, el lin brein,
er mehi !

Me stago ouz ho kein
ar groaz milliget
da bokad da dreid eur brabanser,
ho salver !

N'oh ket mui

va zujidi !

D'ar maro! pe stouit dirag on Doueou !
d'al loened gouez 'vo roet ho korfou.

Nag a hoarz er goueliou,
pa weler loened, hirr o dent, dirollet,
o youhal wardro tud chadennet,
o sailla,
o trailla,

ar hig hag an askorn! eur vreh en o genou
eur vreh beo a strink anezi gwad ruz-tan!

Nag a youhadennou
epad o zremenvan!

An dud a gar ar gwad,

sehed o deus a wad,

a wad tud evel do;

o redeg tomm bero!

Gantan e vint mezo !

an dud a zo diaoulou

n'eus ket par d'o skilfou !

° °

Romaned! Romaned, tud a zeskadurez !

An deskadurez ne ra netra !

An dud a jom gouez,

ha d'ar hrog distera,

ar hi a zav e benn en askre

a voug mouez an ene.

° °

Chadennou ! Chadennou ! Kredi a rit hoaz ?

en noaz ?

O zaolit, soudarded, da zidana el lenn...

skornet eo...

Torrit ar golo !

O soubit ennan beteg o fenn

Kredi a rit c'hoaz

er Groaz !

Gand barrenier houarn o leski er hoell,
treuzit, turiit o horfou divarvel;

ha ! ha ! ha !

Kemerit eun durkez ! sachit o ivinou,
o dent euz o ginou !

Kredi a rez c'hoaz,
Plah yaouank, er groaz ?

-Ya, me wel ar groaz santel,
en neñv ,emay ouz va gervel.

-Saill warni 'ta, soudarded, ha lamm d'he difloura
ar werhezig santel !

-Va ene a zo glan ha ne deuio netra
Barner d'hen difloura !

-Trohit 'ta he bronnou ! amañ 'z eus eur gontell.

-Sonj ho peus en ho mamm, el laez a roe deoh ?

Peoh !

D'ar maro ! d'ar maro. Stagit hi ouz rojou
ar harr braz 'zo aze
la ! breman d'an daoulammou !
hebdale
eo lakaet a dammou
e kreiz hourzadennoù
Hag ar chas a zired da gemered tammou
d'o lonka 'n eur yudal, da lipad
ar gwad !

Bemdeiz ar varnerien, e Rom hag e Bro-Hall
a gase d'ar maro, dizamant, an dud fall
a gare ar groaz.
Ar sklavour en noaz !

Hag kaer o doa ober,
e kreske o niver,
'Vel ma sav ar gwiniz, gand an nevez amzer;
Gwad ar Galilean a zouge frouez puill
diouz an druill !
E groaz a gerze d'al lochennoù,
d'ar paleziou,
d'an armeoù.
Tud pinvidig, sklavourien,
dirazan 'bleg o fenn,
hag a rent bennoz
deiz ha noz
d'an Doue en noaz
staget ouz ar groz !

Konstantin, Konstantin, ma kerez
an treh a vo ganez !
Sav da zellou
wardu an neñvou !

Dirazan ar Groaz
a baras,
An Impalaer, Rom a stouas. !

Oulou tud a dremen...Oulou all a zav d'o freuza.

Buan e tremen amzer Mab-den !

Lod a grog enno terzienn an ourgouill !

Ar groaz a lak da leski o hounnar !

Tremen a raint...ar paourkez merien !

Ar groaz evid re all a skedo da viskoaz.

°
° °

"Me fell din beza mestr, a beb hent, war va zud,

Dre gaer pe dre yud,

Mestr ar horfou !

Mestr an eneo !

Abaoue m'eo sanket ar groaz er halonou,
petra deu da veza va brasa galloudou ?

N'int ket din an dud-se

hag a gred eo Doue.

D'ezañ int.D'ar sklavour

en noaz

war eur groaz !

Hen eo v a enebour !

Nag edo brao gwechall beza impalaer.

Ar galilean-se 'zo deuet dre laer,

da denna digantan e halloud hag e sked !

O ren an eneo e ren peb tra er bed.

°
° °

Me a vezo ar mestr.Ha n'eo ket eur groaz

a eneo ouzin. Ar sklavour en noaz,

m'hen devo ! M'her strinko en eur poull dour-anvoez,

Ha gantan e stlapin evel traou didalvez

ar re a gendalho da bedi ar sklavour.

Ya ! beteg e envor e veuzin er poull-dour !

"Kredet em-eus ennañ ez yaouank,med bremañ

va skiant, va ourgouill a zo eneb dezan.

Ar Zalver ? Me vezo ar Zalver, me reno

va fobl 'vel ma karin.Me roio nerz d'am bro.

En emgann e trehin.Me vezo mestr ar bed.

Den ne lavaro din "an dra-ze zo pehed,

me a ruillo va horv en oll blijaduriou;

Mestr oun din va unan,mestr e vin d'ar boblou.

Hag an dud a stouo ive dirazan-me,

Impalaer Julian,n'eus nemedout Doue !

Hag e saillas,
e vruzunas
ar hroazicu.
E lazas
tud a vilierou.

Ha kaer en-oa t'ehi niver ar beziou
er verejou,
ar groaz a lintre,
e gounnare.

Impalaer Julian ! Ar meou a dosta,
erru int d'or bresa.

Me yelo ! Me yelo ! Me 'zanko va hleze
en o askre !
Allo-ta, soudarded ; d'an emgann 'vid ar vro !

Evel eur bern merien e tired war e dro
tud gant klezeier o lintra hirr ha stank
unan a zank
en e gorr hag her rog.
Julian a gouez a stog.
E wad 'deu da ruzia, a beb-tu, ar peuri.
Eun druez e glevoud en noz oh hirvoudi,
evel eur hi,
O hervel d'ar maro !
erru eo !

Ar vuez en em zil euz a gorr Julian
a wel o tond e dremenvar.
Digeri 'ra e zorn hag en e vouzellou
draillet, malet, e krog. 'Vel eun dornad stripou,
stripou tomm ha leun-wad e tiframm abenn-herr
en eur strakal e zent, o strink uhel en êr
Hag e youh an Impalaer Julian:

"An treh a zo ganez, Galilean,
stag ouz ar groaz,
en noaz !"

Re all a zavo
war o meno,

salverien !
Tud ourgouilluz, netra ken !
Leun o hredo.
O skeud a dremeno,
dismantrou !

Gwad a boullou !
Hag ar groaz

warni or Zalver en noaz
o do klasket terri
evid beza mistri,
an eneou,
war o dismantrou
'vel an heol d'ar beure
a skedo adarre !

Gouezidi !
Gouezidi a zo bet a viskoaz ! Gouezidi a
vo bepred.
Med nag a hevier, nag a grakou livet
deom zoken en ol levriou-studi !
Ar Gelted koz ne oant ket gouezidi
pell ahano.

E kreiz ar hoajou, er hromleh eh en em
vodent da bedi an Oll-Halloudeg !
Gedal a raent ar Zalver a dlle
genel euz eur Werhez !
Pa deuas ar Helou...Rom a lazaz
kannaded an Aviel...
E Bro ar Gelted...N'ez eus ket
bet eur merzer !
Gedal a raent kelou ar Groaz !
Dond a rae da gurunenna o hreansou !

E lochenn oa savet e kichen Rumengol.
E unan e veve deiz ha noz o pedi;
E touez ar gwez braz.Karet oa gand an oll
hag eleiz a deus da houlenn e ali.

Ar furnez war e dal a skede. E varo
horr ha gwenn arhantet, kinkladur e gozni
a hade an doujans e peb leh war e dro,
ha bemdeiz e kreske niver e zijidi.

D'ar goueliou e pigne, gand e falz alaouret,
er vezenn, da gutuill ar skouriou dour dero,
'vid ma ve, dre ar bloaz, ganto e dud dalhet
diouz an tan, ar gurun, skilfou kriz ar maro.

"Drouiz koz Rumengol, n'ouzit ket an istor,
ahont war an aotchou,er Hornoh, n'êus ket pell,
bagou a zigasas tud da vro an Arvor,
da embann,emezo, kelou an Aviel.

An Aviel, va Mab, petra eo an dra-ze ?

Konta 'reont, emezo, buhez eun den dispar,
a zo bet o veva e bro ar Galile,
ha laket d'ar maro war menez ar Halvar.
Savet eo euz ar bez, da ziskouez oa Doue.

O banniel zo paour.Hebken eun tamm kroaz,
hag outi astennet o Zalver en noaz.

Pebez kelou, va Mab ! va lez eur pennadig !
An drouiz koz a flour, war e zrez, e varo,
a zerr e zaloulagad ha neuze, goustadig:

"Ha mad int ouz ar re o veva war o zro ?"

Klevet em+eus, drouiz, e rannont o madou,
e karont ar paour hag int prest, emezo,
da rei beteg o gwad evid an eneo.
Evito, m'o hreder, o deus lezet o bro !

Souezuz ! souezuz kenan eo da istor !
Daoust ha klevet e peus da vihana, mignon,
a beleh e tired an dud-ze d'an Arvor ?
-Oll e teuont, drouiz, euz a Vro-Iwerzon!

-Iwerzon,Iwerzon,enezenn an dudi,
douar or hentadou ! bro leun a sklerijenn.
Enni eo e hanas , o mab ! va oll vistri .
Nag em biche karet gwelad o enezenn!

An drouiz a flouras a nevez e varo
hag e savas e benn, 'vel m'en diche kavet
sklerijenn."Da biou-ta, ez eo mab, emezo,
Doue an Aviel, ar Zalver 'zo deuet ?

-Aman vad, o drouiz, ne gomprenan netra.
Mab Doue ! emezo, er bed-man zo ganet
euz eur werhez, drouiz !

O ! eur werhez, petra ?
Ha gwir eo kement-se ? te az peus o hlevet ?

Ya,Drouiz, chomet onn eur pennad d'o zelaou.
Eur Werhez, emezo, eur Werhez digailhar
el lakaez er bed, o drouiz, en eur hraou
An Elez a gane:"Peoh war an douar."

Astenn 'ra e zivreh, drouiz koz Rumengol.
"O va mab, emezan, hounnez eo, hounnez eo,
an hini a hedom, rouanez ar bed oll !
Hounnez eo ar vuhez ! hounnez eo ar seo
a lakay da vleunia er bed ar goantiri;
Kredennou koz va Breiz a gan he meuleudi.
da bellad diouzom krizder ha kasoni
ha da rei ar peoh d'am bugale maro.

Gwir ho komzou, va mab ! Ha ! breudeur Iwerzon,
eur wech all, e teuit da zigas sklerijenn
da spered Arvoriz ha tommder d'o halon !
Ni hede ar helou, skuiz en deñvalijenn.

An drouiz a gouezas d'an daoulin. E zellou
a blanvas heb finval, gwenn evel e varo.
E zivreh astennet, e sellas en neñvou.
E vignon a halvas an oll dud diwardro.

Nag eo kaer, o tudou ! va bro muia karet.
E kreiz ar hoajou braz, er mor, war an hentchou,
me a wel ar groaz, ar groaz kizellet
o lintra da zerr-noz ! Me a wel ilizou,
perlezennou a sked e broig an Arvor.
O zouriou melenet a zav o dantelez
wardu bolz an neñvou. Hag e zivreh digor:
-En o beg her gwelan, Doue an vadelez,
An Hini 'zo deuet ! mab ar Werhez dinamm,
'zo ganet en eur hraou, war e dro an êlez....
e zivreh zo digor ! Ive divreh e vamm !

A viken'm'eus kredet n'edo ket ar Hrouer
eur mestr droug, digalon, o houlenn atao gwad.
Pa welen, o sevel, e houlo er reter,
Pa gleven o kana an deliou er hoad !
me grede oa eun Tad:
Eun tad madelezuz, bepred o pardoni,
eun tad hag a ledin evid va zud, va bro,
da bellad diouzom krizder ha kasoni
ha da rei ar peoh d'am bugale maro.
N'am biche ket kredet va tener e galon,
beteg digas er bed e vab muia karet.
O kelou burzuduz a deu a Iwerzon !
Me a gred ! Me a gred ! Gantan e vim salvet !

"Hag an dud mahagnet a gorr pe a spered
a zired !

Nag eo kaer ar menezioù
goloet a vleunioù !

Nag eo kaer ar hoajou
ar mor, an enezennou.

O ! nag eo kaer an eneoù
a welan o sevel
o tilezel
peb tra louz,
o pignat, didrouz,
skanv,
evel ar plouz en hañv
dizammet ha laouenn !
eun dudi o hanaouenn .!

"O ma Bro, ma Breizig,

ged eun tammig,
ma pignin ganez
da vro ar perlez !
Wardu ar Groaz,
an Hini en noaz
ged-ta !
va broig, ged-ta !
Ganez me ya,
wardu e vamm.
divlamm !

Ar Werhez

Ar Werhez
oh astenn
he dorn gwenn
dit-te
din-me !"

Astog korv e kouezas. An drouiz oa maro.
ha kerkent 'uz d'e benn, sklerijenn a baras.

War e dro

an dud a stouas.

A-uz da benn an drouiz, e lugerne,

'vel an heol d'ar beure

ar groaz.

Stag outi en noaz

Ar Zalver gedet

gand ar Gelted !

OVERENNOU EVID AR ZENT HAG AR ZENTEZED

—DRE RUMMAD.

Ar zent a zo rannet gant an Iliz e meur a rummad: merzerien, Kovesored, gwerhezed...etc...

Evid peb rummad ez eus bet savet eun overenn pe meur a overenn hag a hell servichoud evid ar zent n'o-deus ket a ofis savet a-ratoz kaer evito.

Al lennadennou hag ar salmou da zibaba a vo embannet en diwez.

I-RUMMAD AR VERZER IEN.

1- "Gaudet in caelis"

Evid meur a verzer, er mēz euz an amzer-Fask.

Kan D'AN DIGOR : Tridal a ra gand al levez, en neñvou.
ar zent o-deus kerzet war roudou an Aotrou Krist;
hag ablamour m'o-deus skuillet o gwad dre garantez evitañ
emaint el levez gantañ da viken.

Pedern d'an digor:

Grit, Aotrou Doue, ma teulo deom laouenedigez
diwar or pedennou.

ma heuliim feiz divrall ar verzerien santel A hag A.
a lidom hirio deiz ha bloaz o merzerenti.

Dre or Zalver Jezuz Krist, Ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN.

War ar provou:

Digemerit, Tad Santel, ar provou a lakom dirazoh,
en eur ober memor euz ho merzerien santel;

Ha ni, ho servicherien, grit deom beza divrall atao
o tougen testeni d'hoh ano.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN.

Antivonenn ar Gomunion (Luk 22/28,30)

D'ar re o-do d'alhet nad gantañ e -kreiz e drubuillou,
an Aotrou a lavaro:

- "Me a lak ar Rouantelezh en ho kerz,
ouz va zaol e vezoh o tibri hag oh eva."

Goude ar Gominion:

En ho merzerien santel, Aotrou, ho-peus laket da skedi,
en eun-doare burzuduz, ar mister euz ar Groaz:

Roit deom ar hras, bremañ pa'z om kennerzet
gand ar zakrifis-mañ,
da jom unanet bepred gand ar Hrist
ha da labourad en Iliz evid silvidigez an oll.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

2-*"Multae tribulationes."*

Evid meur a verzer er mêz euz an Amzer-Fask.

KAN d'An Digor: (Salm 33/20-21)

War an dud just e kouez a-fonn an trubuilhou,
Med Doue a zeu beb tro d'o dilivra.

Beilla 'ra war beb-hini euz o eskern
nikun anezo na vezo torret?.

Pedenn d'an Digor:

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ho-peus roet d'ar zent A. hag A.
nerz da houzañv evid an Aotrou Krist,

Deuit c'hoaz war zikour or zempladurez.

N'o-deus ket, ar re-ze, damantet evid mervel evidoh,
ni ivez, evel do, a vo gouest da renta gloar deoh dre or buez.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

War ar provou:

Digemerit gand madelez, Aotrou,
ar brovadenn a ginnigom deoh
o kana meuleudi d'ho merzerien santel
Ra zeuio or provadenn da bardoni or pehejou
ha da ober deoh selaou pedennou ho servicherien.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Antivonenn ar Gominion (Yann 15/13)

-*"N'eus ket brasoh karantez eged rei ar vuez
evid ar re a-garer^m,
eme an Aotrou.*

Goude ar Gomunion:

Maget gand ar gwir vara euz an neñv
 ha deuet da veza eur horv hebken en Aotrou Krist
 e teuom, Aotrou Doue, d'ho pedi.
 Grit ma na vezim dispartiet morse diouz e garantez,
 med ma teuim a-benn euz on oll drubuilhou,
 evel ar verzerien santel A. hag A.
 en eur gared an hini e-neus or haret.
 Eñ hag a zo Doue, beo gand an Tad hag ar Spered Santel
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

3- "Salus Justorum"

Evid meur a verzer er mēz euz an Amzer-Fask.

Kan d'an digor: (Salm 36/39)

Silvidigez an dud eo an Aotrou
 hag o gwarez da vare an anken.

Pedenn d'an Digor:

Aotrou Doue, ra zeuio da rei deom levenez
 kurunenn or breudeur, ho merzerien;
 Ma lako da greski nerz or feiz
 ha ma vim frealzet dre o fedennou.
 Dre or Zalver Jezuz Krist.....

pe:

Pedenn ho merzerien santel A. hag A.
 ra zeuy, Aotrou Doue, d'on erbedi ouzoh;
 Ma vim drezi kennerzet da ziskleria ho kwirionez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist.....

War ar provou:

Ni ho ped, Aotrou Doue, ma plijo ganeoh
 digemer ar brovadenn a k laka dirazoh ho pobl
 evid kana meuleudi ho merzerien santel A. hag A.
 Ma teuio deom chom stard e-kreiz on trubuilhou
 evel m'int bet nerzuz e-kreiz o foanipu.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Antivonenn d'ar gomunion (Mark 8/35)

Lavaret e-neus on Aotrou:
 -"An neb a goll e vuez ablamour din ha d'an Aviel,
 a zavetey anezi."

Goude ar gomunion:

Dalhit beo ennom, Aotrou,
 an donezon on-eus resevet digand ho madelez
 gand gouel ar verzerien eüruz A. Hag A.
 Ra zigaso deom ar zilvidigez hag ar peoh
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

4- "Clamaverunt justi"

Evid meur a verzer er mēz euz an Amzer-Fask.

Kan d'an Digor: (Salm 33/18-)

Kriet o-deus an dud just ha Doue e-neus selaouet outo;
euz o oll drubuillou e-neus o dilivret.

Pedenn d'an digor:

Aotrou Doue, c'hwi hag a ra deom
beza laouen beb bloaz gand Gouel ho Sent A. hag A.
Grit deom, ni ho ped, kemer skouer
war an nerz-kalon o-deus diskouezet en o foaniou
ar re a lidom o ginivelez en neñv.
Dre or Zalver Jezuz Krist....

War ar Prover:

Aotrou Doue, en ho madelez heb muzul
ho-peus ranet A. hag A. beteg gloar ar verzerenti;
Roit d'ho servicherien, war bedenn ho merzerien santel
ar pardon euz o fehejou
hag o diwallit diouz peb droug.
Dre or Zalver Jezuz Krist.....

pe: En eur ginnig deoh, Aotrou, ar zakriñis-mañ
evid lida memor ho merzerien A. hag A.
e reom ouzoh or pedenn:
Evel m'ho-peus roet dezo sklerijenn ar feiz,
plijet ganeoh rei deom ar pardon hag ar peoh.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Antivonenn d'ar Gomunion (Rom 8/38-39)

Ni a vez dalhmad taolet d'ar maro ablamour da Jezuz
evid ma vo buez Jezuz, hi ivez,
roet da anaoud en or horv tonket d'ar maro.

Goude ar Gomunion

Dre ar gomunion-mañ, Aotrou,
plijet ganeoh rei deom, a-fonn ho kras,
da geñver gouel ho merzerien santel A. hag A.
An treh - o-deus bet; ra zeuio d'or renta stard e-kreiz ar
hoan
ha leun a levenez er memez treh.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Evid meur a verzer, er mêz euz an Amzer-Fask.

KAn d'an Digor:

War an douar o-deus ar verzerien skuillet o gwad evid an
Aotrou Krist.
En abeg da gement-se o-deus bet o digoll da viken.

Pedenn d'an digor:

En ho madelez, Aotrou Doue, lakit da greski ennom ar feiz;
Peogwir eo gloar ho merzerien A. hag A.
beza dalhet man beteg ar maro,
Roit deom ar hras da veza salvet,
o chom atao fidel daoust da beb trubuil.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

War ar provou:

Taolit, Aotrou Doue, eur zell a vadelez
war ar provadennou a lakom amañ dirazoh;
Ma hellim, evel-se, diwar skouer ar zent A. hag A.
kemer perz, a-greiz kalon, e mister-pasion ho Mab,
emaom bremañ o lida.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

pe:

An ostiv-mañ lakeet dirazoh; Aotrou,
e memor euz an treh gloriuz deuet gand ar zent A. hag A.
Ra zeuio da lakaad da darza en or halonou tan ho karantez
ha da obten deom ar grasou a brometit
d'ar re a jom fidel.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

Antivonenn d'ar Gomunion (Rom 8/38-39)

Nag ar maro, nag ar vuez, na netra grouet
n'hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist.

Goude ar Gomunion:

Maget om bet, Aotrou, gand korv ha gwad ho Mab
hag e teuom c'hoaz d'ho pedi:
Gand gouel ar verzerien santel A; hag A.
grit deom ho kared atao,
evid kaoud demeurañs ha buez ennoh
ha lezel da drei warzu ennoh or halon.
Dre Jezuz Krist, or Zalver?. AMEN.

6--"ISTE SANTUS"

Evid eur merzer, er mêt euz an Amzer-Fask.

Kan d'an Digor:

Beteg mervel e-neus stourmet sant A.
 evid chom fidel d'e Zoue;
 Aon ebed n'e-neus bet rag gourdrouzou an dud dizoue,
 diazezet e oa war ar roh.

Pedenn d'an digor:

Aotrou Doue, gallouduz ha trugaruz,
 c'hwi ho-peus roet da zant A. ho merzer
 beza treh d'e boaniou,
 Grit deom, en deiz-mañ, ma lidom an treh deuet gantañ,
 beza treh, ni ivez bepred, gand ho sikour, war on
 enebour.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

War ar provou:

Deuit, Aotrou, dre ho pennoz, da zante laad or provadennoù;
 Ra zeuint da obten deom, dre ho kras,
 ar garantez birvidig a roe da zant A.
 an nerz-kalon da houzañv evidoh beteg penn.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

pe:

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 ober digemer vad d'an provadennoù a zigasom amañ
 da geñver gouel Sant A.
 Ra blijint deoh evel ma oe prisiuz evidoh
 ar gwad skuillet gand ho merzer.
 dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Antivonenn ar gomunion (Maze 16/24)

An neb a fell dezañ dond war va lerh
 a dlê trei kein dezañ e-unan,
 Kemer e groaz ha dond d'an heul.

Goude ar Gomunion:

Aotrou Doue, ra zeuy ar gomunion-mañ,
 da rei deom an nerz-kalon
 a reas da zant A. ho merzer,
 beza fidel d'ho servicha ha beza treh d'ar boan.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

7--"HIC EST VERE MARTYR"

Evid eur merzer er mēz euz an Amzer-Fask.

Kan d'an digor:

Eur gwir verzer eo Sant A.
rag skuillet e-neus e wad evid ano an Aotrou Krist;
Aon ebed n'e-neus bet rag ar gourdrouzou
hag eet eo da Rouantelez an neñv.

Pedenn d'an Digor:

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
roet ho-peus da zant A. ar hras da stourm beteg mervel
evid ar justis.
Grit deom, sikouret gand e bedennou,
gouzañv dre garantez evidoh kement a zeu d'or gwaska
ha klask, euz on oll nerz,
tizoud beteg ennoh, c'hwi hag a zo or buez.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

War ar provou:

Aotrou Doue leun a drugarez
taolit ho pennoz war or provadennou
startait en or halonou
ar feiz e-neus sant A. divennet gand ar priz euz e wad.
dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

pe(evid eur merzer kouezet evid an unaniez en Iliz)

pe: Aotrou Doue, kinnig a reom deoh ar zakridis-mañ
evid lida gouel Sant A.
Na zeuas ket an trubuillou d'e zistaga diouz hoh Iliz
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Antivonenn d'ar Gomonion (Yann 15/5)

Me eo ar winienn, c'hwi eo ar skourrou.
An hini a jom ennon hag a joman-me ennañ
hennez a zougo kalz frouez.

Goude ar Gomonion:

Renevezet gand ho misteriou santel meurbed
e teuom d'hoh aspedi, Aotrou,
Grit deom kaoud an nerz-kalon e-neus bet sant A.
evid ma hellim anaoud, eun deiz, eürusted ar haradoz,
al lod a roit d'ar re a houzañv evidoh.
dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

8- "VENI BENEDICTI"

Evid, ar verzer, en amzer-Fask.

Kan d'an digor (Mæse 25/34)

D'ar verzerien, d'ar re o-deus stourmet evitañ
An Aotrou a layar:

-"Deuit, tud benniget gand va Zad, resevit en heritaj
ar Rouantelez a zo bet pourchaset evidoh,
abaoe krouidigez ar bed; Alleluia."

Pedenn d'an Digor:

Aotrou Doue, roet ho-peus d'ho merzerien A. hag A.
ar hras da rei o buez evid chom fidel d'ho komz
ha renta testeni da Jezuz Krist ho Mab.

Roit deom nerz ar Spered Santel

evid ma vim doujuz da grëdi

ha kaloneg da ziskleria or feiz

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou

Doue heo ganeoh ha gand ar Spered Glan

a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

pe:

Aotrou Doue, c'hwi a ra d'or zempladurez trei e nerz

ha d'or feiz beza stard;

Grit deom dre skouer ha pedennou ho merzerien A; hag A.

kaoud perz evelde e pasion hag e dazorh ho Mab unganet,

Ma teuio deom kaoud ivez perz ganto:

en eürusted heb par en ho kichen.

Dre or Zalver Jezuz Krist...

War ar provou:

En eur ober memor, Aotrou Doue,

euz maro presiuiz ho mignoned,

e kinnigom deoh ar zakrifis-mañ

a zeu anezañ peb merzerenti.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

Antivonenn d'ar Gomunion (Disk 2/7)

Setu komzou an Aotrou:

-"An trehour a roin dezañ da zibri eur gwezenn arvuez,
a zo baradoz Doue." Alleluia.

Goude ar Gomunion:

Goude m'on-eus lidet en overenn-mañ,

an treh deuet gand ho merzerien santel A; hag A.

ni ho ped, Aotrou:

Ni hag a zebr, er bed-mañ, euz ar bara a vuez

grit ma teuio ganeom an treh

ha ma hellim evelse, en neñv,

dibri euz gwezenn ar vuez

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN

9- "ISTI SUNT SANCTI"

Evid meur a verzer en amzer-Task;

Kan d'an Digor (Disk 12/11-12)

Bezom el levenez gand ar verzerien;
Trehet o-deus dre vad an Oan.
N'o-deus ket karet o buez beteg tehed a-raog ar maro;
Setu perag e renont gand an Aotrou Krist, da viken. Alleluia

Pedenn d'an Digor:

Aotrou Doue, plijet eo ganeoh e teufe ar zent A. hag A.
diskleriet ganto o feiz e maro hag e dazorh ho Mab
da gaoud perz endod gloriuz ar verzerien;
Grit d'or halonou beza leun a levenez
e-keid ha ma lidom ar memor anezo.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

pe:

Aotrou, On Doue,
laket ho-peus gwad ar verzerien
da veza eun hadenn a gristenien nevez;
Grit, ni ho ped, da barkeier an Iliz
trempet gand gwad ar zent A. hag A.
taoler eun cost founnuz evid ho kloar.
Dre or Zalver Jezuz Krist.....

War ar Provou:

Taolit, Aotrou Doue, eur zell a vadelez
war ar provadennoù a lakom dirazoh:
Ma vint santelleet gand ar Spered Santel
ha ma lakint en or halonou
ar garantez birvidig-se a zikouras ar verzerien A hag A.
da veza treh d'o oll foaniour.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Antivonenn ar Gounioù (II Tim 2/11-12)

Ma varvom gand an Aotrou Krist, gantañ ni a vevo;
Ma houzañvom gantañ, gantañ ivez ni a reno. Alleluia

Goude ar Gounioù:

Bremañ, p'on-eus debret euz ar bara-se n'eus nemetañ
gand gouel ho merzerien santel A hag A.
ni a zeu d'hoh aspedi, Aotrou;
Grit deom stardaad bepred en ho karantez
ha beva euz eur vuez nevez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

10- "Lux perpetua"

evid eur merzer en Amzer-Fask.

Kan d'an Digor

(IV Esdras 2/35)

Eur sklerijenn heb diskar a skedo evid ho merzerien, Aotrou,
beva 'raint da viken. Alleluia.

Pedenn d'an Digor:

Evid rei sked d'hoh Iliz, Aotrou Doue,
eo plijet ganeoh rei d'an den eüruz A.
kurunenn ar verzerenti:
Grit deom, ni ho ped, kerzed war e roudou
o kemer skouer evelañ war basion or Zalver,
ha mond evelse d'an eürusted beurbaduz.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

War ar Provou:

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
digemer ar zakrifis a unvaniez hag a veuleudi
a ginnig deoh ho servicherien da geñver gouel sant A.
ho merzer.
Dezañ da obten deom ar pardon euz or pehejou
ha da ober deom ho trugarekaad da viken.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN.

Antivonenn d'ar Gomunion (Yann 12/24-)

E gwirionez, m'hen lavar deoh,
ar hreunenn taolet war an douar
ma ne varv ket ne zoug netra;
ma varv avad e taolo frouez eleiz. ALLELUIA

Goude ar Gomunion:

Da geñver gouel Sant A. on-eus resevet gand levenez
ar bara ho-peus roet deom, Aotrou,
hag e teuom c'hoaz d'ho pedi;
Peogwir eh embannom, er pred santel-mañ, maro ho Mab,
grit deom kaoud lod, gand ho merzerien,
en e adsao da veo hag en e hloar.
Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll-viskoaz da virviken. AMEN

11- PEDENNOU ALL EVID AR VERZERIEN.

Evid misionerien merzer.

Pedenn d'an digor:

Aotrou Doue, gallouduz ha trugarezuz,
ni a zeu da bedi ho madelez:
Dre brezegerez ar zent A. hag A.
ho-peus desket da boblou divadez anaoud ho Mab;
Grit d'ar poblou-se,, dre zikour pedennou ho merzerien
chom stard en o feiz.
dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

War Ar provou;

Aotrou Doue, ni hag a ra enor
d'ar poaniou gouzañvet gand ho zent A. hag A.
Grit ma teuim da embann en eun doare deread
en overenn-mañ
maro ho Mab unganet.
Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

Goude Ar Gomunion;

Greet ho-peus deom, Aotrou Doue, tañva levenez an Neñv,
hag e teuom c'hoaz d'ho pedi:
Grit deom, evel ma reas ar zent A. hag A.
douden en or halonou
ar merkou euz karantez ha pasion ho Mab,
ha kaoud evelse perz er peoh ne vo fin ebed dezañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. MAE EMEN.

12- EVID EUR WERHEZ MERZEREZ.

Pedenn d'an Digor: Aotrou Doue, beb bloaz e roit deom laouenedigez
gand gouel santez A.
a zo bet eur skouer a hlanded hag a nerz-kalon.
Roit deom hirio sikour he meritou.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

War ar Provou:

Aotrou Doue, ar brovadenn-mañ a ginnigom deoh
gand gouel Santez A.
Roit digemer mad dezo
evel m'eo plijet deoh he merzerenti.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

Goude ar Gomunion:

Aotrou Doue, dre ho kras he-deus bet da santez A.
war eun dro kurunenn ar gwerhezad
ha kurunenn ar merzerezed;
Grit deom, dre nerz ar gomunion-mañ
beza treh da heb droug
ha kaoud perz, eun deiz, e gloar ho Rouantelez
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

13-Evid EUR VAQUEZ SANTEL MERZEREZ.Pedenn d'an digor:

Aotrou Doue, c'hwi a laka an nerz-kalon
da vleunia en e gaer e-kreiz ar zempladurez;
Selaouit ouz pedenn ar re a lid gloaz Santez A.
Bet he-deus diganeoh an nerz da veza treh,
ra zeuio deom, dre he zikour, ar hras da drehi d'on tro
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan.
a-oll-viskoaz ha virviken. AMEN

War ar Provou:

Gand laouenedigez Aotrou
e kinnigom deoh ar zakrifis-mañ;
Drezañ eo eh embannom ho purzudou
pa reom memor euz an treh deuet gand Santez A.
eüruz o houzoud e ped evidom en neñvou.
Dre Jezuz Kristn, or Zalver. AMEN.

Goude ar Gomunion:

Aotrou Doue, bet on-eus an tañva euz an eürusted beurbaduz
oh ober memor euz Santez A.
hag en eur gemer perz er zakramant
C'hwi hag ho-peus roet deom ar hras da lida ho misteriou
ni ho ped a galon:
Grit ma vezintgouest d'o reseo gand eur galon virvidig
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.